

SN2-3-082

= 3 =

SANTEZ-ANNA-AR-PALUD

Diskan :

Meulomp oll gant joa,
Meulomp santez Anna !


Santez Anna, mam d'ar Verc'hez,
Hom beuz choazet da batronez,
Mam goz Jesus, Salver ar bed,
A zo mam goz d'ar Vretoned.

Meur a gant vloaz zo, hon tadou
O deuz bet anezhi kelou,
Hervez ma eo deut d'eomp ar brud,
Coz eo burzudou ar Palud.

Dre bec'hejou ar yaouankis,
Goude ma oa kollet ker Is,
Roue Kerne, hanvet Grallon,
A voa mantret bras he galon.

Hag evit trei malloz Doue
Pell diouthan, deuz bro Kerne,
E roas dre wir binijenn
Cals a vadou en aluzenn.

Eul loden d'hezan da veva,
Ar Palud da santez Anna,
Rumengol d'ar Verc'hez Vari,
Ha Landevennec da bedi.



He vignon mad sant Guenole
A voa karget gant ar Roue
Da zevel ti santez Anna
Ha ti an Itroun Varia.

Savet oa 'ta dirag ar mor
Chapel santez Anna Arvor
Hag ar bobl a bep corn ar vro
'Zirede da bedi eno.

Abaoue a zo bet bep bloa
Pardon braz e Santez-Anna,
A dreuz an eil canvet d'eben
Eo deut ama ar bobl christen.

D'ar zul diveza a viz Eost,
A zeu tud a bell hag a dost,
Breiziz 'zeu c'hoaz ha deiz ha noz
Da bardon santez Anna goz.

Paour ha pinvidic d'ar pardon
A zeu da glask peoc'h ar galon :
Var dachen santel ar Palud,
Santez Anna zicour cals tud :

Tud divar ar meaz ha re deuz ker,
Tud mac'hagnet ha paotred terr,
Tud a vor ha tud a vrezel,
Ha meur a vam gant he bugel.

Na pebeus anaoudegez vad !
« Deut omp, Mam, d'ho trugarecad,
» Dreizoc'h d'hor poanion omp bet trec'h
» Santez Anna zo hir he brec'h.

» Scullit 'ta ho madoberou
» Var'nomp, var hon tiegeziou,
» Var al labourer en dachenn,
» Var hor bagou en tarziou guenn.

» Pa renko mont hor bugale
» Da zoudardet, heul an arme,
» N'ho dilezit ket e pell bro,
» Gant ho feiz ra zeuint endro.

» Ha ni a vo chomet er ger
» Ho pedo gant cals a breder ;
» Ni reio var hon daoulin noaz,
» Tro oc'h iliz, bihan ha braz.

» Da zeiz ar pardon 'vimp gullet
» Diarc'hen, var gorf hon rochet,
» Oc'h eulia, en hon dorn goulou,
» Prosesion ar miraclou.

» Kent kimiada deuz ar Palud
» Gant carantez ni ho salud,
» Hag e peb lec'h ni a gano :
» Er Palud e ma Mam hor bro.

» Na vo mui dero er c'hoat braz,
» En dachen na vezo iéot glaz
» Kent beano Breiz da gana
» Meuleudi da zantez Anna. »

Santez Anna e ribl an aod,
Stereden aour ar-martolod
Endra vo mor dirag ho ti
Kendalc'hit cre feiz Breizidi.

OFERENNOU HAG OFISOU

E SANTEZ ANNA-AR-PALUD

1° D'ar 26 a viz Gouere, gouel santez Anna, oferen-bred da zeg heur ;

2° D'ar zul diveza a viz Gouere, e vezo great atao hiviziken pardoun bian : oferen-bred, gousperou, prosesion, benedikcion ar Zakramant ;

3° Bep sul a viz Eost, nemet d'ann eil sul, oferen vintin hag oferen-bred er Palud ;

4° Ar pardoun braz a vez ato d'ar zul diveza a viz Eost, hag a zo eur gouel euz ar re gaera. An deiz araok e vez ive oferen-bred ha gousperou er chapel ;

5° D'ar meurz varlerc'h ar pardoun braz, oferen-bred adarre evit achui ar miz konsakret da Zantez-Anna-ar-Palud.

Edoug ar bloaz e vez ive an oferen-bred e Santez-Anna, d'ann eil sul euz ar C'horaiñ, d'ar meurz Fask, d'ar zul goude ar Yaou-Bask, ha d'ann trede sul euz ann Asvent.

Erfin, bep meurz epad ar bloaz e vez oferennoù e Santez-Anna, hag e kovesaer eno ar belerined.

PARDOUN BRAZ

SANTEZ-ANNA-AR-PALUD

Ar pardoun braz e Santez-Anna-ar-Palud a vez d'ar zadorn ha da zul diveza a viz Eost.

D'ar zadorn

Ann oferen genta da bemp heur ; oferennoù all goude betek deg heur.

Da zeg heur, oferen-bred.

Da beder heur, gousperou solanel. — Ar zarmoun, ha goude-ze prosesion ar miraklou.

D'ar zul

Oferen genta, da beder heur. Oferennou all da 5, 6, 7, 8 ha 9 heur.

Da zeg heur hanter, ann oferen-bred hag ar zarmoun.

Da ziu heur, ar gousperou, ha raktal goude, ar prosesion enn dro d'ann dachenn ha benedikcion ar Zakramant.

D'ar meurz

D'ar meurz varlerc'h ar pardoun braz, e vez oferennoù er Palud azaleg c'huerc'h heur betek deg heur.

Da zeg heur, oferen-bred ha prosesion evit achui ar pardoun. Ar chapel a jom digor epad ann deiz.

Azaleg ar zadorn vintin betek ar zul da greizdeiz, heb heana, ar belerined a gavo konfesoret e Santez-Anna.

D'ar zadorn, pedennou diouz ann noz da 9 heur. Ar pedennou diouz ar mintin, raktal goude hanter-noz.

Hed ann daou zevez, goude ann oferen-bred hag ar gousperou, e roer da bokat rele-gou santez Anna.

A hed amzer ar pardoun e vezo hepred eur

beleg er sakretiri o venniga ar chapeledou, kroaziou ha metalennoù, pe imachou, hag o kemeret hano ar re a c'hoanta en em lakat e Breuriez santez Anna.

Er sakretiri e vezo kavet da brena goulou evit ar prosesion, kantikou hag imachou santez Anna.

Evit ar prosesion, ar re a zoug goulou, en em renko dioc'htu varlerc'h ar baniel braz, ar merc'hed er penn araok.

BREURIEZ SANTEZ ANNA-AR-PALUD

Dre aket an Aotrou 'n Eskop Graveran, e oe fountet, gant urz ann Tad Santel ar Pab Gregor XVI, eur Vreuriezh e iliz ar Palud enn honor da zantez Anna, er bloaz 1841.

An Tad Santel a ro d'an oll genvredeur, oc'h ar c'hondisionou ordinal, ann induljansou plenier merket ama varlerc'h :

1° En deiz ma vezer laket er Vreuriezh ;

2° Deiz pardoun ar Vreuriezh a vez d'ar zul goude ar Yaou-Bask ;

3° Ean artikl ar maro, var bouez beza gla-c'haret, ha lavaret da viana a galoun ann hano sakr a Jezuz ;

4° Peb oferen lavaret e iliz Santez-Anna evit eur c'henvreur maro, a dalvez dezhan ive eun induljans plenier.

Ann Tad Santel a ro ouspenn eun induljans a seiz vloaz ha seiz guech daou-ugent dervez, evit bizita Santez-Anna, d'ann eil sul

euz ar C'houraiz, d'ar meurzh Fask, ar zul varlerc'h eizvetez ar Zakramant ha d'an trede sul euz ann Asvent.

Erfin, tri-ugent dervez induljans evit pep hini euz ann oberou-mad, greet gant ar genvredeur. Ann oll induljansou-ma a c'hell profita d'ann anaoun.

INDULJANSOU ALL A C'HELL BEZA GOULENNET
GANT PEP UNAN E SANTEZ-ANNA-AR-PALUD

Induljans plenier, var boez kovez ha sakramanti n'euz forz e pelec'h, da gement hini a bedo e iliz Santez-Anna, evit hon Tad Santel ar Pab :

1° Deiz ar gouel (26 Gouere), ha bendez epad ann eizvetez betek ann 2 a viz Eost. (Talvouduz d'ann Anaoun) ;

2° D'ar zul kenta ha d'ar zul diveza a viz Eost ;

3° D'ar zadorn dere'hent ar pardoun braz ;

4° D'ar meurzh varlerc'h ar pardoun-ze. (Talvouduz d'ann Anaoun) ;

5° Eur meurzh bep miz epad ar bloaz, var boez lavaret teir guech ar *Grado* enn honor d'ann Dreindet-Santel. (Talvouduz d'ann Anaoun.)

Erfin, tri-c'hant dervez induljans d'ar 1, 13 ha 31 Eost, ha bep sul ha bep meurzh, euz ar miz-ze, da gement kristen a bedo gant devosion e iliz Santez-Anna-ar-Palud.

KANTIKOU

Cantik en honor da Zantez-Anna-ar-Palud

Anna; il est, gratiosa sive misericors.

Tost da zaou vil bloas tremenet,
E voa ganed e creiz bro Jude,
Caeroc'h 'vit an heol alaouret
Pa bar er goahrenn da c'houlou-de,
Eur grouadurez sacr meurbed,
A vugale Israel ar' gaera,
A lignez huel ar-Roued,
A berz Doue voa hanvet Anna.

Diskan :

Santez Anna var ar Palud
Bezit da viquen hor patronnez,
'Vel hon tud coz ni ho salud,
Diskuezit d'homp ker braz madelez.

Salud, o rozen dudius,
Salud, o glana fleurdelizenn,
Salud, o guened burzudus,
Salud, o skedussa viriaouenn !
Honor, ha gloar, ha carantez
Da Vam zantel ar Verc'hez Vari !
E peb korn a Vreiz da jamæz
Ra vezo, canet ho meuleudi ;

Endra vo tud e Breiz-Arvor,
Enn'hi vo canet ho meuleudi ;
Rac c'houi eo stereden ar mor,
Sclerijen ha skoazel pep hini.

E peb leac'h euz a Vreiz-Izel,
A vezo henoret oc'h hano,
Ha peb Breton, a vouez huel,
Daoulinet dirazoc'h a gano :
Piou a glevas laret biscoas
E deus bet reizet eur beden :
M'ar sco an anken voassoc'h-voas,
Creoc'h-cre d'an den e ro soutenn
Deut oll eta, ho Mam ho car,
Evidoc'h he c'halon zo digor ;
Deut, paourkez labourer douar,
Deut, tud a vizer, deut, tud a vor !
Creiz eur glao, eur gurun euzuz,
Pa veler trec'het gant an diroll,
Labourou eur bloavez poaniuz
En eun deiz epquen o vont da goll :
En eur astenn he dorn santel,
E teu da zavetet an douar,
He galloud outhan a gass pell
Droug-malloz an amzer e kounar.

Dre vurzud bemdez a zizro
Guall heur divar ar vartolodet,
Pa zaill ar mor bras didann'ho,
En ho listri heb stur ha brevet :
Enep an dour hag an avel,
He brec'h a zalc'h al lestr m'ar pleg,
Surroc'h evit n'alfe derc'hel
An eor houarn pa stag er c'herreg.
Pe zoudard a ve diouallet,
Dre he madelez, er brezellou ;
Nag a dud e deuz savetet
Euz ar maro, euz a glenvejou ;

Biscoaz den n'en deuz-niveret
Ar burzudou a ra he bennoz,
Stancoc'h int evit ar stered
A luc'h var an oabl pa zeu an noz.
Deut eta, Bretonet fidel,
Deut oll da zevesion ar Pardon,
Epad miz Eost, euz he chapel
Tostait oll gant devosion
Mar deo calon tener Mari
Eur galon carguet a drugarez,
Anna he mam evidomp-ni
Ne deuz ket nebeutoc'h carantez.

PEDENN DA ZANTEZ-ANNA-AR-PALUD

TON : *D'hor Mamm Santez Anna*

Mamm zantel a Vari,
Salud a greiz kalon ?
Enor ha meuleudi
D'hor Mamm ha d'hon Itron !

DISKAN :

Itron santez Anna,
Ni ho ped gant joa !
Mirit tud an Arvor.
Var zouar ha var vor !

Biscoaz n'euz bet klevet
Klemm euz ho drugarez ;
Ar Palud benniget
Eo trôn ho madelez.

Dous eo bet d'hon tud koz
Tanva ho karante,
Ha ken dous ho pennoz
A vo d'ho pugale.

Selaouit hor pedenn,
Mamm garet Breiz-Izel !
Selaouit hor goulenn
Bemdez enn o chapel !

Truez evit ar yamm
A velit ken aounik !
Dalc'hit, dalc'hit dinamm
Kalon he buguelik !

Truez 'vit ar paour
Dirazoc'h daoulinet !
Truez 'vit ar c'hlanvour,
Hor c'honsolit bepret !

Skuillit er parkeier
Gliz pinvidik ann Ee !
Skoazel d'al labourer,
Skoazell, en han' Doue !

D'ann den yaouank roit
Eun tenzor a-furnez,
D'ann den koz goulennit
Eur fin vad d'he vuez !

Er mor braz kounnaret
Bagik ar pesketour
Spountuz a vo lounket
Ma ne deuit d'he zikour.

En tarziou didruez
Kerzit tud ann Arvor,

Rag evel ar Verc'hez
Eo steredenn ar mor !
Bezit ive nerzuz,
Soudarded Breiz-Izel :
He dourn holl-gallouduz
'Vo ganeoc'h er brezel.

Evidomp holl ar bed
Eo tachenn an emgân :
Oh ! n'hon dilezit, ket,
Pa m'omp e kreiz ann tân :

Patronez dous a Vreiz,
Diouallit mad ho pro ;
Kreskit ennomp ar Feiz,
Hirio, varc'hoaz, ato !

O Mamm santez Anna,
Dindan ho tiouaskell
Peger kaer eo beva,
Peger kaer eo mervel !

CANTIC EN HENOR SANTEZ ANNA

Saludomp gant devosion
An Itron santez Anna :
Leveromp dezi a galon
Dirag e aoter amâ :

Diskan :

Santez Anna, hor Patronez,
Hor sikourit en danjer
Ha bezit hon alvocadez
Dirac Jesus hor Zalver.

Santez Anna, mam ar Verc'hez,
A dra sur zo gallouduz,
He merc'h en env zo Rouanez,
Gwir vam d'Hor Zalver Jesus.

Pep unan da santez Anna
Gant fizians en e boaniou,
A velomp oc'h en em voestla
Hag o vont d'he chapeliou.

Ar vamm evit he buguelic
D'an Itron santez Anna
A ra bemdez eur bedennic
Hac a zesk dezan kana :

Ar soudard o vont d'an arme
D'an Itron santez Anna
En em erbedo, ha neuze
A guerzo en eur gana :

Ma teu an tourmant da c'hoeza
Ar martolod a bedo
He Batronez santez Anna
Ha disourci a gano :

Al labourer var he dachen,
Evit en em ziskuiza,
Dioc'h e dâl a sec'h ar c'hoezen
Hac en em ro da gana :

Ar pastor e bâr ar menez,
He zenved en dro deza,
Lies a vech d'he Batronez
O c'heus clevet o kana :

O vont d'ar mintin d'he zervez
Ar micherour a bedo

Santez Anna, he Batronez
Ha gant fizians a gano :

E pep korn eus a Vreiz-Izel,
An Itron santez Anna

E deus eun ilis, eur chapel,
D'eomp oll d'y da bardonna.

Evel hon tud coz, Bretounet,
Henoromp santez Anna.

Pe zoump klanv, pe zoump ankeniet
Ne skuizomp ket o kana :

CANTIC EN HENOR SANTEZ ANNA

Kanomp a vouez hñel
Mam goz hon Doue ;
Ni oll e Breiz-Izel
Zo he bugale !

Nijit a denn-askel,
Elez an Envou,
Ha gant tud Breiz-Izel,
Savit ho moueziou.

Var lein ar meneziou
Kouls hag en draonien,
En ecleo d'hor moueziou
A respount laquen.

Tarziou ar mor direiz
Spount ar martolod,
A lavar en ho c'his,
O vervel en aod :

Kurun braz o krozal,
Luc'het o virvi,
Drouk-avel o strakal,
A zent oll outhi.

Ar c'hlanvour diboaniet
Gant santez Anna,
Er Palud a zired
Laouen da gana :

Trec'het diroll ar mor,
Deut he vag d'ar gêr,
Martolod an Arvor
A gan dibreder :

Dizro eus ar brezel
Dre veur a vuzud,
Soudarded Breiz-Izel
A gan er Palud :

Pleget var an dachen,
Labourer douar,
Da zec'ha ho c'houezen,
Bemdez c'houi lavar :

O clask eun tam bara,
E hars toul-an'or,
Kan... paour, santez Anna
Te gavo digor !

D'an dall ro ar gued,
Nerz d'an digalon,
D'ar bouzar ar c'hlevet,
Peoc'h d'an anaon.

Kaout a ra d'ar pec'her
Distro da Zoue,

Ha dirag he varner
Truez d'he ene.

Allaz ! nag a boaniou
Gouez varn'homp bepred
Blonset eo kalonou
Kals tud eus ar bed.

O Mam santez Anna,
Dindan ho mantel,
Kusit ho pугale
Er Palud santel.

Ha goude hor maro,
Diboan, dic'h lac'har,
Oll ni en em gavo
Da gana er gloar :

DISKAN :

Meuleudi, meuleudi, d'hor mam santez Anna,
Meuleudi ha bennos, er Palud, en deiz-ma !

EIL DISKAN :

Henor, bennos da zantez Anna,
Meulomp, meulomp ar Vam ar vella !

HANO SANTEZ ANNA

Ton : *Bale Arzur,*
pe Guerc'hez Vari, j'aime, etc.

Santez Anna, hano meulet,
E Breiz-Izel kement caret,
Hano dous, hano caer meurbet !

Pe z'oun er boan hag en anken,
P'e zoun evurus ha laouen,
Santez Anna ! eo ma feden.

Cousket out coant, bugel bihan,
Var da vuzellou a velan
Eur musc'hoarz caer 'vel heol enhan.

Bemdez, bemnos, 'harz ma c'havel,
Santez Anna a gas eun ael
D'astenn varn'hon he ziouskel.

Criz ar brezel, tennou a zo
Ken a yerv an tan tro var dro,
Soudard Breiz, tost eo ar maro !

Kentoc'h ar maro, 'vit an tec'h !
Santez Anna zo hir he brec'h !
Dreiz-hi en emgan me vo trec'h.

Bihan da vag ha braz ar mor,
Dinerz da stur, dispeg an heor ;
Crena dlez, martolod Arvor !

Guelloc'h 'vit goeliou na sturiou,
Santez Anna, dre an tarziou,
A gas d'eomp d'ar ger hon bagou.

Pe gant da falc'h, pe gant da var,
Pe en hero stog en alar,
Stard eo did, labourer douar.

Pa vez re skuizet ma divrec'h,
Santez Anna 'glaskan d'an ec'h,
Tre hon daou e lakan ar bec'h.

Pa deu ken aliez an dud fall
D'ho kaillara ha d'ho tamall,
Beleien Breiz, piou ho tiouall ?

Santez Anna hon difenno,
Ganthi eo deut ar Feiz er vro,
Dre he gras ni er c'hendalc'ho.

Eb ti na tan, arc'hant na den,
Pa c'houlennaz an aluzen,
Paour kez, p'hini eo da beden ?

Pa zan da glask ma zam bara,
En eur bedi santez Anna,
N'am euz guelec dor o sarra.

O tiouall da zenvedigou,
Messaer, var lein ar menezioù,
Ouz petra 'zellez en envou ?

Ouz santez Anna, mam hor bro,
Gant'hi Sænt-coz Breiz zo enn'ho :
Na me garfe beza gantho !

Var he vele, pe 'n e gavel,
Pa velit goal glan o pugel,
Petra rit, mammou Breiz-Izel ?

Var hon daoulin ni n'em laka
D'er goestla da zantez Anna,
Sur omp deuto da barea.

Gant o penn baz poan o kerzet,
Guen can ho pleo, c'hui daoubleget,
Tad coz, pe seurt peden peuz gret ?

Dridal gant dudi ha bennoz :
Gant ar c'hleier a skiltr d'an noz.
Va mamm am galv d'ar baradoz.

Aour hag arc'hant, guened, mor braz,
Bols steredennet an oabl glaz,
Santez Anna zo caeroc'h c'hoaz.

En oabl, er mor, var an douar,
A vouez hùel Breiz en lavar :
Santez Anna n'euz ket he far !

A SAINTE ANNE

REFRAIN :

O sainte Anne, ô Mère chérie, [jours,
Garde au cœur des Bretons la foi des anciens
Entends du haut du ciel le cri de la patrie,
Catholique et Breton toujours !

Des Bretons puissante patronne,
Nous te saluons à genoux,
Comme à nos pères douce et bonne,
Veille toujours, veille sur nous.

Car tu le sais, au temps antique,
Ils se sont à toi consacrés,
Et les enfants de l'Armorique,
Par toi furent tous adoptés.

Et depuis, dans notre patrie,
O Reine du pays breton,
Ou peine ou bonheur de la vie
A tout se mêla ton saint nom.

A chaque âge de notre histoire,
Ce fut l'héritage transmis ;
Aux Bretons foi, vigueur et gloire :
Car sainte Anne les a bénis.

Mais voici l'heure de tristesse,
Pour notre foi nous combattons,

Ah ! fais que nous restions sans cesse
Et Catholiques et Bretons.

Si pour garder notre foi pure,
Il nous faut lutter et souffrir,
O Mère, avant toute souillure,
Fais que nous sachions mourir.

La Bretagne est toujours fidèle,
A l'Eglise, au Pontife-Roi.
Elle est à toi, veille sur Elle,
Garde-lui son Christ et sa foi !

CANAOUEN

DA ZANTEZ ANNA AR PALUD

Evit an detz m'eo bet Curunet

Ton : Pange solemnes.

* Patronez Breiziz, Santez Anna garet,
Hirio Breiz-Izel zo aman diredet
Da rei testeni deoc'h euz he c'harantez
C'houi, mam ar Verc'hez.

DISKAN :

Ra vo curunet Santez Anna Balud,
He deus great aman ken alies a vurzud
'Vit an dud fidel ho deus great ho feden
Dirag he skeuden.

Savomp hor moueziou en deiz-man, ma
clevor

Leon, Kerne, Treger, ar menez, ann Arvor,
Breiz, en hoc'h-enor, Breiz a-bez, o cana

O Santez Anna.

O caera devez gulet ar gurunen
A-berz an Iliz, laket var ho skeuden !
Santez ar Palud, Mam-goz ar Vretoned
Ra viot meulet.

Pa 'zeamp d'ho pardon beteg Chapel Guened
Ho cavemp ken caer gant ho pen curunet
Ma fell d'eomp ive, kerneviz, ho cuisca
Mam Santez Anna.

Bennoz d'hon Escob, bennoz d'an Tad Santel
Evit an enor ho deuz great d'ho chapel,
N'euz den er vro-man na drido he galon
M'an deuz goad breton.

Ni hoc'h anavez, Itron Santez Anna :
Aman hon tadou deue da zaoulina ;
Guelit o tonet breman ho bugale
Var vor, var vale.

O Mam, ho calloud a zo braz en envou :
Da biou e casfemp guelloc'h hor pedennou ?
Rag ho mab-bihan eo an Holl-c'hallouduz
Hor Zalver Jesus.

An Tad-Eternel en deuz ho tibabet
Da rei ar vuez dhe Verc'h muia caret
Hag en ho cozni e c'hahint eur bugel,
Ar Verc'hez Santel.

Pebez levenez, gulet en he c'havel
Ar c'hrouaduric purroc'h eguet eun el,
Ar Verc'hez skedus evel eur stereden
Ar Verelaouen.

Mari zo deuet, dre eur burzud dispar
Euz a c'hras Doue, dibec'h var an douar ;

Hag, o chom guerc'hez, eo galvet da c'henel
Mab an Eternel.

Var Galon Jesus, piou, goude ar Verc'hez
A c'helfe beza, coulz ha c'houi, Rouanez ?
Deoc'h hor c'hanticoù, deoc'h hor meuleu-
Hag hor pedennou. [diou.]

O Santez Anna, hor bro eo oc'h hini
Mirit na gouezo droulans Doue var-n-hi.
An ifern, siouaz ! a ziroll he gounar
Var hor c'horn-douar.

Ar fals credennoù bemdez en em asten :
Harpit er vro-man bepred ar feiz christen
Holl, braz ha bihan, scoazellit ac'hanomp
Pedit evidomp.

GWERZ SANTEZ ANNA AR PALUD

(Kurunet d'an 31 a viz Eost 1913)

I

Diredet omp gant dudi,
Mam-goz Salver ar bed,
D'ho kwelet ha d'ho pedi
D'ar Palud benniget,
Hor c'halon drant ha laouen
Ennomp deu da dridal,
Pa velomp ar gurunen
O lintra var ho tal.

DISKAN :

Santez Anna ar Palud,
Hor mam hag hon intron,
Oll hirio ni ho salud
Hag ho ped a galon,
Mil bennoz d'an deiz santel
M'ho kweljomp a nevez
Kurunet e Breiz-Izel,
E Palud Plonevez.

II

Goude ma voue sebeliet
E kreiz islonk ar mor,
Ker Is, ar ger milligét,
Perlezen an Arvor,
Grallon roaz Rumengol
D'an Itron-Varia,
Hag ar Palud en digol
D'hor mam Santez Anna.

III

Breiz-Izel eo ho leve
Ha bepred ho karo,
Ni vezo ho pugale
Betek pred ar maro ;
En hor c'halon asamblez
Vo moulet an dounna
Gant hano dous ar Verc'hez
Hano Santez Anna.

IV

Kent c'hui voa hor patronez,
Hor mam hag hon intron,

Brema oc'h hon Rouanez,
Er Palud ma ho tron,
Ha goude hini Gwened
Ken brudet e pell bro,
Skedusoc'h ne vo gwelet
E Breiz ha tro var dro.

V

Savet e kreiz an teven
Na kaër eo ho chapel !
Ar pardonet zo laouen
Pa er gwel euz a bell,
Kelc'het gant ar menezioù
Ha mor Douarnenez,
Dindan bolz aour an envou
N'en deuz ket he farez.

VI

Ama dirak ho skeuden
Gwechall hon tadou koz,
A gare dont da c'houlen
Ho skoazel, ho pennoz ;
Var ho lerc'h hor bugale
Dre ho roudou santel
A gendalc'ho da vale
Ha deoc'h a vo fidel.

VII

Ar zonz euz ar burzudou
C'hoarvezet er Palud,
A zo dreuz ar c'hantvejou
Chomet beo touez an dud,

Burzudou hag a ziskwez
Ez eo ho kalon tom,
O peuz bet atô truez
Euz an den en ezom.

VIII

Ama en deuz rekouret
Ar c'hlanvour ar pare,
An den dall en deuz kavet
Ar gweled adarre,
Hag eur werz koz a lavar
O peuz, Santez Anna,
Betek chas klanv e kounnar
Lakêt da argila.

IX

Ha piou c'hello lavaret
Pegement a c'hrasou
A zo dreizoc'h, mam garet,
Redet var an eneou,
Abaoue an deiz santel
M'o deuz deoc'h hon tadou
Savet ama eur chapel,
E bro goz ar Porzou.

X

Savet eo a vell d'an ôd
Vit diouall an Arvor,
C'hui eo nerz ar martolod,
He eil stereden vor ;
Bemdez arôk kimmiada
Euz ar ger hag he dud,
E rei eur zell diveza
Etrezek ar Palud.

XI

Pa velo er Gornaouek
Ar bar du o sevel,
Pa vervo kreiz ar c'herrek
Ar mor gant an avel,
Ar martolod reuzedik
Elec'h chom da grena,
A raïo eur bedennik
D'he Vam Santez Anna :

XII

« Va zikourit, mam dener,
» Da dremen beg ar Raz,
» Va bagik a zo dister
» Hag ar mor a zo braz ;
» Diarc'hen ha diskabel,
» Intron Santez Anna,
» Me raïo tro ho chapel
» Pa z'in da bardouna. »

XIII

Kendalc'hit, o mam zantel,
Da ziouall ho pro Vreiz,
Kuzit e pleg ho mantel,
Ho tenved euz ar bleiz ;
Ra jomo ar Feiz kristen
Bepred en hor c'halon,
Soun ha start 'vel an derven,
Enor hor c'hoajou don.

XIV

Niver an dud dizoue
A gresk atô e Breiz,

Brezel a rêr da Zoue,
D'he Iliz ha d'hor Feiz ;
Hor zikourit en enkrez,
Ho prec'h a zo nerzuz,
Dre ma z'oc'h mam d'ar Verc'hez
Ha mam-goz da Jezuz.

LITANIOU SANTEZ ANNA

Autrou Doue, ho pet truez ouzomp.
Jesus-Krist, ho pet truez ouzomp.
Autrou Doue, ho pet truez ouzomp.
Jesus-Krist, hor selaouit.
Jesus-Krist, hon exaucit.
Tad celestiel, a zo Doue, ho pet truez ouzomp.
Mab Redemptor ar bed, a zo Doue, ho pet truez ouzomp.
Spered-Santel, a zo Doue, ho pet truez ouzomp.
Santez Anna, pedit evidomp.
Santez Anna, Mam goz Jesus-Krist,
Santez Anna, Mam Mari bepret Guerc'hez,
Santez Anna, pried Joachim,
Santez Anna, mam-gaer Joseph,
Santez Anna, arc'h Noe,
Santez Anna, arc'h alianç an Aotrou,
Santez Anna, menez Oreb,
Santez Anna, grizien Jesse,
Santez Anna, guezen frouezuz,

Santez Anna, diskennet a lignez ar rouanet,
Santez Anna, joa an Elez,
Santez Anna, merc'h ar Batriarchet,
Santez Anna, mouez ar Brophetet,
Santez Anna, gloar ar Zent,
Santez Anna, gloar ar Veleien,
Santez Anna, goabren leun a c'hliz,
Santez Anna, goabren lugernuz,
Santez Anna, lestr leun a c'hraç,
Santez Anna, melezour an obeissanç,
Santez Anna, melezour ar basiantet,
Santez Anna, melezour a drugarez,
Santez Anna, melezour a zevotion,
Santez Anna, scoazel an Iliz,
Santez Anna, refuch ar bec'herien,
Santez Anna, assistanç ar gristenien,
Santez Anna, delivranç, ar gaptivet,
Santez Anna, consolation an dud demezet,
Santez Anna, mam an intanvezet,
Santez Anna, gouarnerez ar guerc'hezet,
Santez Anna, pors ar vartolodet,
Santez Anna, hent ar beacherien,
Santez Anna, remed ar re gian,
Santez Anna, iec'hed an dud dinerz,
Santez Anna, sclerijen ar re zal,
Santez Anna teod' ar re vud,
Santez Anna, scouarn ar re vouzar,
Santez Anna, sicour kement hini a deu d'en
em erbedi ouzoc'h, pedit evidomp.
Autrou Doue, ho pet truez ouzomp.
Jesus-Krist, ho pet truez ouzomp.

V. Doue en deus caret santez Anna.

R. Hag en deuz caret ive he ganet.